

Diviz

<p>RÉM LaM Deuit 'ta plac'hig, un dra 'meus da lâr dit.</p> <p>LaM RÉM</p> <p>Petra tad-kozh 'ta, deus petra a zo kaoz ? Ar yezh brehoneg a zo o vont da get ! Ha klev 'ta hiziv trouz ar Redadeg !</p> <p>Diskan RÉM LaM Redet 'vez, tamm ha tamm bemdeiz LaM RÉM Gant glav, avel, evit ar Redadeg Redet 'vez, tamm ha tamm 'vel se Asambles, treuskasimp brezhoneg</p> <p>Ha setu ma zro da dreuskas yezh ma bro Met penaos 'vo graet 'vit deskiñ brezhoneg ? 'Po 'met dont ganin da zizoloeiñ. Ha klev 'ta hiziv trouz ar Redadeg</p> <p>Bremañ 'zo skolioù 'vit deskiñ brezhoneg Gwechall 'oa ket droed, pinijet e voent N'eus ket arouez ken, plijusoc'h eskemm Ha klev 'ta hiziv trouz ar Redadeg</p>	<p>Gall a rit mont 'barzh Festoù-noz da zañsal Dañsoù'vit toud an dud : andro, gavot ha plinn Klevet 'vez brezhoneg ha komzet vez gant tud Ha klev'ta hiziv trouz ar Redadeg</p> <p>kendalc'homp neuze an dizoloadenn Tu zo mont da glev' a(r) yezh, ar brezhoneg Gant a' ganerien pe gant a' sonerien Ha klev'ta hiziv trouz ar Redadeg</p> <p>Gall a rez kanañ, kalz kanaouennoù zo. Kontañ buhez an dud hag istor ar vro. Kan ar bobl ivez 'vit mont war al leurenn. Ha klev'ta hiziv trouz ar Redadeg !</p> <p>Setu penaos 'vo graet 'vit deskiñ brezhoneg, Breman t'eus gwelet, da dro eo da dreuzkas. Dit te da foetañ bro ha kejañ gant an dud. Ha klev'ta hiziv trouz ar Redadeg !</p>
--	--